

KIS-418 – Gl. énoncé, énonciation

(GE da HK e stern BAYA – 01 04 92)

Un termen kozh e lavar ar Brederouriezh hon eus aze. O vezañ ma'z eo hollek kenan e ster e vo ar pep emsavañ e ziraez a-dreuz da zerezioù an hollekaat.

Kemeromp ur bomm lavar, forzh pe hini, lakaomp : “*Tomm eo din.*” E glevout a reer diouzhtu evel **eztaolad** a-berzh ur gouzrec'h en amveziadoù dibarek ; al **lakadenn** ez eo n'he deus talvoudegezh nemet a-geñver gant buhezadur ar gouzrec'h unveziat en eztaol.

Kemeromp ur bomm lavar all, evel : “*An Douar zo ur blanedenn*” ; ul **lakadenn** eo, o taveiñ n'eo ket mui da vuhezadur ur gouzrec'h, d'un dangorelezh, met d'an ergorelezh ha degemeret da wir gant an holl. Mar lavarer bremañ : “*Viruz zo en orin ar c'hankroù*” (merkañ e skrivan *zo* ha n'eo ket *a vez*), e stignan ur **c'houlakadenn** — o terc'hel stad eus an imboure'hioù kempredel. Degouezh all : mar daneveller un arnodadenn skiantel, ur wezhiadenn surjaniel pe stlennegel, un darvoud eus ar vuhez hiniennel pe strollennel, e lavarer ivez en o **c'homener** (sl. KIS-248, La-08, p. 80) hag an disoc'h, ar **c'homenad** (Gl. *protocole*, sl. KIS-266, id., p. 107 ; GEAK. p. 193 ; GSTL. ¶¶ 3386 hh.) a dalvez da zerc'hel koun anezho hag, evit an arnodadennoù hag ar gwezhiadennoù, da wehentañ o adober. Kenderc'hel a c'hallfen da ginnig skouerioù all a ve anavezet evel **arlakadenn**, **bonlakadenn**, h.a.

Dastum a reer an holl seurtoù bommoù a venn bezañ danevelloù eus an ergorelezh dindan an anv rumm **erganadoù** (Gl. *proposition*, Al. *Satz*, sl. KIS-359, La-09, p. 82).

Mar kemeromp bremañ diouzh un tu an **eztaoladoù** (ar bommoù a denn o zalvoudegezh eus an dave a reont d'an dangorelezh), diouzh an tu all an **erganadoù** (ar bommoù a denn o zalvoudegezh eus an dave a reont d'an ergorelezh), e c'haller o gronnañ d'o zro dindan un anv rumm (pe usrumm) erdalekoc'h c'hoazh. Merkomp ez ampleg ar gronnañ ur furmelaat : n'eo ket mui kement-se talvoudegezh ar bommoù e-keñver dangorelezh pe ergorelezh a vo desellet, hogen furm pep bomm e kement ma'z eo ur bomm lavar, un **unvez lavar**. Degouezhet omp gant ar pezh a c'halver e galleg

un *énoncé*, a c'haller despizañ evel-henn : “Bomm lavar a zo dezhañ un unded furmel.” An termen boas eo Br. **dezrevell** g. (ha pao., Gl. *énoncer*). N'emaomp ket pell diouzh un termen hon eus bet tro d'ober outañ c'hoazh, a zo Br. **dezgeriad** (sl. KIS-378, La-09, pp. 262 hh.). Damheñvelster eo an daou dermen, an diforc'hioù etrezo o tont war wel dre an arver hepken.

Da skouer, mar skoer war-du ar beurfurmelezh o kemer ur bomm ken goullo a ster ha, lakaomp : “*Penefi zo ur petrefe*” (treuzlakadur Br. eus ar skouer glasel Gl. : “*Humpty Dumpty est un Abracadabra.*”), e rafed anezhañ un **dezgeriad** kentoc'h eget un **dezrevell**. En eheb, e domani ar Ouezoniezh, e reer peurliesañ gant **dezrevell**. Anat ne ve ket direizh eno ober ivez gant **dezgeriañ**, **dezgeriad**, nemet ez eo gwell, a gredan, lezel ar re-mañ gant ur c'hemeradur furmel hag hollek.

Er yezh voutin e c'haller hervez an dro arverañ **dezgeriañ**, **dezrevellañ**, **geriañ**.

Er pennad Diougonerezh kaset dimp gant HK, an *activité d'énonciation écrite* a c'hoarvez eus ul labour a-berzh ar bugel evit **geriañ** (lakaat e rezh gerioù) un istor a-geñver gant ur blegenn (buhezadenn, tresadenn, dafar lavarel, h.a.). Ar striv a c'houlenner digantañ da zegouezhout gant un destenn gevazas a gantreizh arver ar rakger **dez-**. Ac'hano **dezgeriañ** ? **dezrevellañ** ? Dereat an daou moarvat. Koulskoude e kostezfen gant **dezgeriañ**, dre zaou zamabeg : a) gwelloc'h eo lezel **dezrevellañ** gant lavar ar Ouezoniezh pe, ac'hoel, gant ul lavar o tamantiñ d'ar resisted ; b) **dezgeriañ** a ental an damant d'ar furmelezh ha piaouekaat furmelezh al lavar eo amkan an diougonerezh desellet er pennad-mañ. Un trede abeg, asvan abeg kentoc'h, eo ar gerentiezh c'herluniadel etre **dezgeriañ** ha **disgeriañ** : unan eus an treugoù kinniget d'ar bugel evit disoc'hañ gant an **dezgeriañ dre skrid** eo an **disgeriañ d'an oadour** (“dictée à l'adulte”) ; hevelep kerentiezh c'herluniadel a c'hallfe talvout da c'houskor d'ur geñveriadenn etre an div oberiezh.